

CHAPEL TY-MAMM-DOUE, KERFEUNTEUN

# Bleun-Brug

Niv. 37 AN TAD MANER

MAE 1951

## Ha paet eo ganeoc'h ho koumanant 1951 ?

Ma n'eo ket, her grif raktal,  
Eun tammig bolontez vot mar plij,  
Ha bennoz Doue d'eoc'h !

- |  |     |     |
|--|-----|-----|
| 1) Koumanant bloaz d'an 12 niverenn, brezoneg ha galleg.   | 400 | lur |
| 2) Koumanant bloaz d'an 8 niverenn brezonek hepken . . . . | 300 | lur |
| 3) Koumanant d'ar 4 niverenn c'hailek hepken . . . . .     | 190 | lur |
| 4) Koumanant a enor . . . . .                              | 500 | lur |

**Kas an arc'hant da : V. Seite, Bleun-Brug, Tréboul (Finistère).  
C. C. P. 544-22 Nantes. — Lakaat ouz kein ar chekenn-bost pe ez eo  
eun adkoumanant, pe unan nevez.**

**Evit kement a zell ouz danvez-skrid ar gelaouenn, skriva da : rener  
Bleun-Brug : M. l'Abbé Laurent B'leunver, recteur de Plomelin (Finistère).**

**Klaskit d'eomp koumananterien nevez.  
Pep lenner a dle klask eul lenner all.**

## Eur goulenn

Petra 'blij d'eoc'h, petra 'zisplij d'eoc'h, ha petra 'garfec'h kaout en ho  
kelaouenn ? Responnit, mar plij. Klask a raimp ober diouz ho responchou.  
**Ar responchou gwella a vo embannet** e korn al liziri.

## TAOLENN

<b>An Tad Mat</b> , L. Bleunven . . . . .	1
<b>Buhez an Den Eurus Julian Maner</b> , Tad d'He- rouville S. J. . . . .	3
<b>Kalon an Tad Maner</b> , J. Uguen . . . . .	4
<b>Santelez an Tad Maner</b> , Tad Jollec S. J. . . . .	10
<b>Kroaz an Tad Maner</b> , Rozavel . . . . .	11
<b>An Tad Maner hag ar brezoneg</b> , L. Lok . . . . .	13
<b>E-touez skoazellourien an Tad Maner</b> , Y. V. Perrot . . . . .	14
<b>Pajenn ar vugale</b> , K. Riou . . . . .	16
<b>Geriou Kroaz an Tad Maner</b> , K. Riou . . . . .	17

# AN TAD MAT

gant L. Bleunven

**M**IZ Mae ar bloa-mañ a vo merket evidomp, dreist-holl, Bretoned,  
gant eun nevezenti vras : an Tad Maner, misioner hag abostol  
hor bro, edoug ar seiktekved kantved, a vo savet gant an Iliz  
da renk an Dud-eürus.

An Tad Maner a zo unan eus an dud en deus sanket, an douna, e  
roudou war zouar Breiz-Izel. Soñjet hon eus oa mat ha talvoudek lakaat  
dirak daoulagad hol lennerien an divras eus ar pezh m'eo bet e vuhez hag  
e labouriou.

An niverenn-mañ, en he fez, a ouestlomp d'ezañ. Dreizi e karfemp  
ive lakaat hor bokedig er gurunenn gaer a veuleudiou a bigno, en deiziou-  
mañ, war-zu ennañ, a bep tu da Vreiz ha dreist pep tra eus Rom,  
kalonenn an Iliz...

Evit gwir, pep pazenn eus buhez an Tad Maner a zo burzudus. Met  
ar burzud brasa ha n'eo ket an doare m'eo deuet da veza misioner  
breizat ?

Lavaret a c'heller, gant gwirionez, eo bet roet ha degaset d'eomp  
gant Doue, dre bedennou nerzus Dom Mikael an Nobletz. Pell araok beza  
e welet, hemañ en doa bet anaoudegez a-berz an neñv, e teuje, eun deiz,  
d'e zikour ha da gemer e blas e labour ar misionou brezonek.

P'edo o rei eur mision e Douarnenez, e kreiz unan eus e brezegennou  
e lavaras : « Ret eo trugarekaat Doue, rak ganet eo e eskopti Roazon an  
hini a dle dont war va lerc'h... »

Ar wech kenta ma'z eas an Tad Maner da Gonk-Leon, Dom Mikael,  
e galon o tridal, a c'halvas e amezeien hag a lavaras d'ezo : « Va bugale  
ger, bezit leun a joa ganen, setu amañ hiviziken, rener Misionou Breiz-  
Izel ; digaset eo gant Doue evit rei skoazell d'ar Vretoned da vont d'ar  
baradoz ! »

Hervez ar pezh a lenner diwar-benn bloaveziou kenta e vuhez, Julian  
ar Maner n'en em zante ket douget war-zu bro Vreiz. Ne ouie ket a  
Vrezoneg hag e spered hen troe kentoc'h war-zu an diañvez bro. Met  
goude beza bet ar c'hras digant Mamm Doue da zeski hor yez, e berr  
amzer, ha goude beza gwelet sklêr youl Doue warnañ ec'h en em stagas  
a greiz kalon ouzomp hag evit atao.

Den ebet n'en deus karet ar Vretoned hag ar brezoneg muioc'h  
egetañ.

O komz eus hor yez e roe d'ezi ar veuleudi dispar-se, « n'he doa  
servichet morse da skigna kredenn faoz ebet ».

Den ebet, kennebeut, n'ez eo bet muioc'h karet en hor bro. An Tad  
mat benniget eo an ano kaer a roed d'ezañ. Da fin eur mision, pa gimide  
diouz an dud ha pa roe d'ezo e aliou diweza, n'oa ket eun dra râl gwelet  
an holl, koz ha yaouank, o leñva d'ezañ, evel bugallgou. Ar bec'herien  
distroet ouz Doue a lavare a vouez-uhel : « Bennoz d'ar vamm he deus ho  
laket er bed ; bennoz ive d'an douar a vezo bezlet ho korf ennañ. »

Gant seurt karantez n'eus ket da veza souezet ma z'eo bet e varo eur  
c'hañv bras evit Breiz a-bez.

D'ar mare ma teuas Julian ar Maner er bed, e penn kenta ar sektekved kantved, n'ez ae ket, siouaz, kaer an traou en hor Breiz. M'he doa kollet he frankiz, pellik a oa, edo ive, tra wasoc'h c'hoaz, war-nes koll teñzor hep par ar feiz.

Tristidigez vras a oa, dre holl, er Vro :

« Dizursiou ha plijadur, n'oa ken e-touez an dud  
A voe kouezet ken izel hag anevaled mut. »

Met eur vro, evel hor Breiz, hag a oa bet luskellet en he c'havel gant kement a zent ne c'helle ket beza dilezet gant Doue.

Mikael an Nobletz hag an Tad Maner a deuas. En dachenn bet lamet an drez hag ar spern diwarni gant Dom Mikael, an Tad Maner a dro, a hado greun mat an Aviel. E vouez ive a dregerno eus an eil parrez d'eben hag an dud spontet a zihuno, a leñvo d'o fec'hejou, a jencho buhez. War e labour, reizet ha diazezet bepred war spered ar ouenn, eun eost puih a zantelez a zavo...

Divent eo ar vad graet gantañ en 238 parrez m'en deus labouret enno...

Seul belloc'h omp bet o c'hortoz an enor emañ o vont da rei d'ezañ, seul c'houekoc'h eo d'hor c'halonou breizat.

Ra blijo gant Doue, ar Werc'hez, e vamm, sent Breiz en deus desket kement d'hon tud karet, rei d'eomp ar joa da welet, hep dale, ar servicher bras-se da Zoue lakat war roll ar Zent, gant an hini a zo bet e Dad, hervez ar galon, Dom Mikael an Nobletz...

Pa z'eo ken enkrezet hor sperejou, hirio ive, o welet an diaoul o freuza al labour graet ganto, war-zu enno, ive, e kasomp gredus hor pedenn ma c'hellimp, dre o skoazell, anaout ezommou tud hon amzer hag o ren eveldo war hent ar zantelez.

L. BLEUNVEN.



Gwerc'hez Chapel  
Ti Mamm-Doue  
Skeudenn-goz eus  
Amzer an Tad  
Maner.

Dirazi  
an Tad Maner  
A bedas ar Werc'hez  
da zeski d'ezan  
Ar brezoneg.

# BUHEZ AN DEN EURUS JULIAN MANER

1606-1683

**A**R zoñj eus an Tad Maner, hag a zo bet lakat, gant Hon Tad Santel ar Pab, Pi XII, war roll en dud-eürus, d'an 20 eus miz Mae, a zo atao beo-buhezek, e Breiz-Izel. E kalz ilizou, evit gwir, en eur goumañs gant iliz-Veur Sant-Kaourantin, e kaver taolennou livet, pe gwer a liou hag a ra memor anezañ. E ano a zo enoret c'hoaz e meur a barrez, ha niverus eo, eus kostez Keraez, Motreff, Rostrenen, ar gristenien a ya da bardona da Blevin, d'an iliz venniget a vir e relegou prizius, abaoe tost tri c'hant vloaz 'zo.

Kenta garfemp, en niverenn-mañ, eo lakaat, dirak an daoulagad, eun diverra eus petra eo bet buhez ar servicher bras-se da Zoue, hen diskouez, a-dreuz e amzer hag e-touez an dud m'en deus bevet ganto. Ha n'eo ket goud, beza e anavezet gwelloc'h eo e vezo aesoc'h d'eomp e garet muioc'h, e bedi gant brasoc'h fiziañs ha bale d'e heul war hent ar vertuziou santel?

## I. — GALVET GANT DOUE

An hini a dlie beza abostol Kerne ha Leon, a zo bet ganet e Breiz-uhel, er penn pella eus eskopti Roazon, war harzou an Normandi.

E Sant Jorj Reintembault, parrez e gavel eo e tremenas e vloaveziou kenta, etre an ti a genwerz, a zalc'he e dud, an iliz, ken tomm dija d'e galon, ar park « park an draen-spern » el lec'h ma ranke mont da ziwall bloc'h an tiegezh. Dirak eur skeudennig d'ar Werc'hez hag a zo miret c'hoaz er presbital e karte mont alies da zaoulina. En-dro d'eur groaz, anvet « kroaz al lenn » eo e vade paotredigou e oad hag e teske d'ezo bale, en urz vat, e prosesion, oc'h ober evel-se a-vihan, ar pez a dlie diwezatoc'h ober, a-vras, ha gant pegement a frouez evit an eneo.

Abred, abred e tiskouezas kaout eun devoñson dreist e oad. Ar pez a reas d'eur beieg, kollet hirio e ano, e gemeret da rei d'ezañ kentellou latin. Barrek e oa kavet, e berr amzer, da vont da skolaj an Tadou Jesuisted, nevez digoret, e Roazon.

Eno, war eun dachenn vrasoc'h, ar c'hrennard a yelo war arak gant al labour a abostolerez, boulec'het ker mat, e Sant Jorj. Met, dija, gant tud divadez ar broiou pell eo emañ e soñj. Evit gellout dont a-benn eus e daol e ra e c'houlenn da veza digemeret e Kompagnunez Jezuz, da fin e studi: met gwall yaouank eo c'hoaz.

D'ar mare-se, an Tad KOTON, Jesuist brudet, bet gwechall kovesour ar roue, a zeuas d'ober eur bale da skolaj Roazon. Julian Maner a yeas d'e gaout evit e aspedi da harpa e c'houlenn. O welet eun den yaouank, doare ker santel d'ezañ, an Tad Koton ne varc'hatas ket evit lavaret ya d'ezañ.

P'en em gavas e leandi Sant Jermen, e Pariz, e miz gwengolo 1625, e vanke c'hoaz eun devez bennak d'an den yaouank evit beza resevet e-touez ar relijiuzed. Evel ma ne oa ket a c'hoant da rei dor zigor d'ezañ, Julian a lavaras: « Va lezit, da vihana, da vont d'ar chapel da lavaret eur bedennig. » Lezet e voe. Pedj a reas ken kalonek, Sant Joseph, ma voe renket hep dale an traou.

Den ebet morse n'oa bet eürusoc'h eget Julian Maner: « Er baradoz, emezañ, oun en em gavet amañ. »

An daou vloaz e Sant Jermen a dremenas evel eul luc'hedenn. Graet gantañ e veuion kenta, hon den yaouank a voe kaset da gêr La Flèche, da gendrec'hell e studi. Eur skol vras ha brudet o doa eno ar Jesuisted. Mont a rae ar studi war arao. En-dro da Julian ez oa kalz re all, lemm o spered ive. Bec'h a veze etrezo. Alles e La Flèche, e teue kelou eus misionou an Amerik renet gant ar Jesuisted. A-wechou e teue misionerien da gomz eus o misionou, da lavaret oa kaer an east met bihan niver an eosterien. Kalon Julian a dride gant ar c'hoant mont di, ha beza ive, marteze, eun delz, merzer, evel e vignon mat, Sant Isaac Jogues... Met Doue en doa e sonj warnañ.

Choazet en doa d'ezañ eun dachenn all, ha daoust pegen disheñvel oa, eun dachenn ive kaer meurbet.

## II. — E BREIZ-IZEL

A vec'h echuet gantañ deskj skiant ar furnez, ar breur Maner, rak n'en doa ket resevet c'hoaz an Urziou sakr, a voe kaset da Gemper da ober skol. Fiziet e voe ennañ ar pemped klas. Kregi a reas kerkenj gant e labour, hag a zevri.


Daoust pegen didrouz bennak e oa bet graet an traou, unan a anavezaz ar c'helou: Dom Mikael an Nobletz oa. Eur vouez en doa lavaret d'ezañ: « It da Gemper da skolaj Tadou Kompagnuez Jezuz: eno e kavoc'h an hini a zo bet dibabet evit beza ho mab hag a reno misionou Breiz Izel war ho lerc'h. »

Dom Mikael a oa e Douarnenez. En eur redadenn e teuas da Gemper, da skolaj an Tadou. Goulenn a reas gwelet ar yaouanka anezo, hag, hep rei da anaout d'ezañ ar pezh en doa klevet diwar e benn, e komzas d'ezañ eus ar c'hras kaer en devoa graet Hor Salver da Andre ha da Ber, o c'hervel anezo da vont d'e heul hag eus an dever en en deus an den d'en em zistaga diouz pep tra, evit heuilh mouez an Aotrou Doue. Goudeze her briatas gant teneridigez hag e tizroas da Zouarnenez. Diwar neuze eur vignoniaj santel a voe skoumet etrezo. Dom Mikael ne zizoñjo morse ar weladenn genta-se... « An Tad Maner, a skrivo, dek vloaz goude, a zo eur misioner penn kil ha troad, eur gwir vogel da Sant Ignas... Hen anaout a ris, adalek ar wech kenta m'her gwells, e Kemper... »

Ret eo lavaret, ar rejant yaouank ne zoñje ket kalz, d'ar mare-se, e misionou Breiz-Izel. Gant ar C'hanada eo edo muioc'h muj e spered. A nebeudou, koulskoude, war-lerc'h komzou misterius Dom Mikael, hag ive re an Tad Bernard, a bourchue warnañ chom er vro-mañ, e soñjou a droe.

Aet da bardona, da japel Ty-Mamm-Doue, hirio e Kerfeunteun, e tigoras e galon d'Ar Werc'hez: « Ma karit dont d'am zikour, emezañ, da zeski ar brezoneg, gant aotre va zupioried, me a stago d'al labour. »

An aotre a deuas d'ar Pantekost 1631. Daou zervez goude, an Tad Maner a ouie brezoneg a-walc'h evit ober katekiz, ha goude c'houec'h sizun, oa barrek da brezeg, hep skriva eur ger eus ar pezh a dlle da lavaret. Ma n'oa ket aze eun donezoun eus ar Spered Santel, oa, da vihana, eur merk sklér oa deuet ar Werc'hez d'e zikour.



SELLIT PIZ OUZ AN TAOLENNOU  
ZO MELLEZOUR AN ENEOU,  
HAG A LAVAR DA BEP HINI  
AR WIRIONEZ HEP DAMANTI.

Diwar neuze, da zul ha da c'houel, Julian a yeas da brezeg d'ar parrezioù tro-war-dro da Gemper; met a-benn daou vloaz an den paour n'oa mui gouest da herzel ken. Kaset e voe da Dour da ziskuiza hag ac'hano da Vourj evit penrober e studioù hag en em lakaat e stad da veza beleget.

### III. — WAR-NES FALLGALONI

E Bourj, Julian Maner a gavas e vignoned koz hag ive re nevez, evel an hini a dle beza ar merzer, Sant Gabriel Lallemand. Ar re-mañ a reas ar pezh a c'helljont warnañ evit hen distaga diouz Breiz, hag ober d'ezañ mont d'ar C'hanaada. En desped d'al liziri a skrive d'ezañ, eus a Gemper, an Tad Bernard, ar relijius yaouank a voe, koulz lavaret, gounezet ganto. Met Dom Mikael a bede hag a rae pinijenn evit an hini a dle dont war e lerc'h. Etre daou, Julian a gouezas gwall glañv. Ar c'hrign beo a grogas en e vrec'h kleiz hag ar vedesined a gollfe fiziañs. Ar Breur Maner a gredas e oa tost ar maro d'ezañ hag en em bourchase laouen da rei e ene da Zoue. Goulenn a reas komunia eur wech c'hoaz. Met souden, evel pa vije denet keuz d'ezañ da veza dilezet misionou Breiz, e reas le, ma teufe da barea, da implija ar rest eus e vuhez o prezeg an Aviel e Breiz, gant ma vije aotreet gant Tad rener kompagnunez Jezuz. Komunia' reas ha kerkenñ Hor Salver a roas d'ezañ da anaout e pefe a-barz pell. Hag, e gwirionez, ar c'hrign beo a jomas a-sav, ar vrec'h a zigocñvas hag a deuas da veza ker brao ha biskoaz. Ar vedesined a welas eno dourn Doue.

Kerkenñ ha ma voe pare, ar Breur Maner en em roas adarre da studia. En amzer-se ar Jesuisted yaouank ne vezent beleget nemet p'o deveze peure'hraet o studi war ar skianchou sakr. Julian a voe galvet d'ar velegiaj, da zadorn pevare amzer ar Pantekost 1637. E oferenn genta a lavaras dez gouel an Dreinded. Epad e vuhez e talc'has soñj eus an deiz kaer-se. Plou en defe sonjet neuze e vije laketa war an aoterioù, tri c'hant vloaz goude, da gêner an deiz-se ive? Adalek bloavezioù kenta e vuhez a relijius, ar Breur Maner en doa skrivet: « An nep a zo dibabet gant Doue evit pignat ouz an aoter, ne dle soñjal nemet e traou an neñv. »

Pegement muloc'h, goude beza denet da veza beleg, ec'h heullas ar reolenn-se a zantelez.

Providañs Doue, koulskoude, ne seblante ket digeri an hent d'ezañ da zont da Gemper evit boulec'ha labour ar misionou.

E Kemper an aotrou N'Eskob Le Prestre ne felle ket d'ezañ klevet ano eus misionou. « N'eus ket a protestanted em eskopti, emezañ; n'eus ket a ezomm a visionou. »

Perak kas eta an Tad Maner da Gemper, p'en doa difenn d'ober misionou? Ouspenn-se, ar misionou a goustfe ker. Eus pelec'h e teufe peadra da zikour ar visionerien? De Nevers eo e oa kaset d'ober skol. Epad m'edo eno eo e skrivas da Dad Rener Kompagnunez Jezuz da zisplega d'ezañ e pe stad truezus edo Breiz Izel hag en doa graet le, epad eur c'hleñved, m'en dije ar pare, da vont da brezeg eno an Aviel, hag a lavare ive en doa desket ar brezoneg. Jeneral ar Jesuisted a gavas mat ar pezh en doa graet an Tad Maner hag a roas urz d'e gas da Gemper kerkenñ ha ma vije gellet.

Eur c'hammed bras a oa graet. E miz cost 1640; an Tad a en em gave e Kemper, ha prest goude, an aotrou N'Eskob Le Prestre a varve; e barr e vrud. An eskob nevez, an Aotrou Ronan al Louet, a vezo unan eus skoazellourien wella an Tad Maner e labour ar misionou. Arc'hant a deuas a-berz tud vat, en o zouez Richelieu e unan. Digoret'oa an hent. Dom Mikael a c'helle beza laouen: kavet en doa eur mab hervez e galon hag an ero boulec'het gantañ e-touez ar Vretoned a oa o vont da veza kaset da benn.

### IV. — 43 BLOAZ MISIONOU

Hiviziken, ha betek e varo, an Tad Maner a jomo stag ouz skolañ Jesuisted Kemper. Eno eo e raio e ziskenn, ac'hano eo ez aio hag e teuo, hep ehan, da vro Gerne ha Leon, alies a-walc'h de eskoptioù Treger, Gwened ha Sant Brieg, a-wechou da re Roazon ha Dol. Nemet eur wech, e Pariz (1680), ne welomp ket en defe kuitget Breiz, edoug ar bloavezioù hir-se. Eur mision koulskoude a roas e Landivy, eur barrez tost da Sant Jorj, bro e gavel.

Epad Jubile 1650, en doa bet esperañs da vont da Rom evit kovez ar berc'hirined vreizat. Met ne voe ket roet a aotre d'ezañ: Breiz, a respontas d'ezañ an Tad Jeneral, en deus re a ezomm ac'hanoc'h, Hag, e gwirionez, goude dek vloaz labour, sikouret hepken gant an Tad Bernard, en doa tizet dija tost d'eun hanter milion a eneoù.

N'emañ ket en hor soñj mont d'e heul eus an eil bourc'hadenn d'eben. An hent a raio peurvuia war e dreid, eur wech bennak war varc'h, awechou ive ez aio dre vor, evit mont eus an eil korn d'egile. D'ar parrezioù, ar muia dilezet, da dud paour enezennou Sun, Eusa, Molenez, eo e raio frouez kenta e labourou. Burzudou, pareañsou a c'hoarveze war e roudou hag an eneoù a zistroio ouz Doue a wir galon. Goude an enezennou e teuo tro ar porzioù mor ha parrezioù an douar bras. E pep lec'h, an dud a ziredo d'e zelaou. Lod a rae dek, pemzek, ugent leo evit dont d'ar mision.

Nebeut a nebeut ar vro a-bez a vo nevezet.

Tri zra, e-touez kalz re all, a verko evit an holl-viskoaz ar misionou roet gant an Tad Maner: an taolennou, ar c'hantikou hag ar brosesion vras evit kloza ar mision. Kenteliet mat'oa bet war ar poent-se gant Dom Mikael an Nobletz.

Dre an TAOLENNOU, mellezour an eneoù, e tiskouezo stad reuzeudik ar pec'her, ardou an droug-spered ha kaerder buhez ar c'hras...

Ar Vretoned a gar klevet kana, ha kana o unan. « Gwerz trist, soñ dudius a ziwan eno... » Evit o sikour da anaout o relijion, evit ma chomo beo en o c'halon ar gwirionezioù kristen, ar misioner santel a zavo eur bern KANTIKOU KAER, a vezo enno an diverra eus ar pezh a zo ret kredi pe ober evit beza salvet. Evel-se kentelioù ar mision a vevo padus en eneoù.

Kerkenñ ha ma tigre ar mision, en eur barréz bennak, an Tad Maner a roe da anaout e vefe klozet dre eur BROSESION VRAS; diskleria a rae ar misterioù eus ar relijion a vere skeudennet er brosesion-se. Dibaba rae ar re a ziskoueze ar muia bolontez vat epad ar mision hag e verke d'ezo ar roll o defe da ober, hag e raent eus ar gwella. Skel an daoulagad evit gellout, dre eno, tizout gwelloc'h ar sperejou hag ar c'halonou, setu ar pezh a glaske an Tad Mat; rei da gompren d'an dud pegement int bet karet gant Doue, lakaat en o c'halon kasoni evit ar pec'her, youl da Ober pinijenn.

Souezus eo ar vad en deus graet ar servicher Doue d'ar Vretoned, gant ar 400 mision bennak en deus roet en o zouez; dreizo e vezo kelennet bep bloaz, an eil bloaz dre egile 40.000 den, klevet 10.000 kovesion jeneral ha konvertiset 3.000 pec'her kaledet.

Er penn kenta ne oa nemet an Tad Bernard hag hen ouz o c'has en-dro; a-nebeudou beleien ar parrezioù a deuas d'en em ginnig d'ezañ hag a valeas betek ugent ha tregont, er memes amzer, dindan e urzioù ha war e roudou. Tudjentil zoken ha n'o doa ket bet roet atao ar skouer vat, a yeas da veleien evit rei an dourn d'ezañ, evel an Aotrou Tremaria, eus Kastel Kerazan e Cleden Cap Sizun; e vab kaer an ao. Kerizac hag an Ao. de Guer, markiz Pontcallec a varvas person e Riec. Etouez ar veleien-se, a oa tost da eur mil anezo, an Tad Maner a gavas prezegerien helavar (unan anezo a voe lesanvet ar « Ciceron breizat ») kovesored desket, ha leun a furnez, evel an aotrou Galerne pe an Ao. N'Estour.

Pa voe digoret ar prosez evit ober enklask war vuhez an Tad, eur strollad mat anezo, c'hoaz beo, a deuas, er bloaz 1714, da rei testeni eus e zantelez. Gant unan eus e skoazellourien, an ao. Leudeger (diazegour leanezed ar Spered Santel, e Sant Brieg) eo e voe kentellet Sant Loiz Grignon Montfort war an doare m'en em gemere an Tad mat evit kas e visionou en-dro.

Youlek atao da ober muioc'h mui a vad, an Den eürus a ziazezas retrejou, harvez reoleznoù Sant Ignas, evit peurober labour ar misionou.

Evit sikour an dud reuzeudik eus e amzer, a oa en em werzet d'an droug Spered, da anzañ o zorfjou, an Tad Maner a gavas eun doare ijinus da ober goulennoù outo. An doare-se a voe kavet mat gant eur strollad beleien desket ha santel eus a Paris, en o zouez Sant Visant a Baol, Tadou Karmez Santez-Anna-Wened, brudet, dre holl, evit beza kovesored ampart, a heulias war ar poent-se kenteliou an Tad Maner.

Oberiantiz, koulz ha labouriou an Tad Maner ne zeuas tamm diskar ebet enno. Evel m'en deus diskleriet, unan eus e genlabourerien wella, an ao. de Tremaria, mervel a eure en eur rei misionou hag e varo memes a oa eur mision. O tremen dre Sant-Brieg, ec'h anavezaz oa tost e amzer ziweza. Tiz warnañ, e kemeras hent Kerne, bro e galon. Ha ne zigoueze ket ec'h echufe e vuhez war zouarou Sant Korantin? A-hed an hent e prezegas c'hoaz e Plougernevel. Diskaret gant ar c'hleñved, e Plevin, parrez demdost da Geraez, hag a oa d'ar mare-se stag ouz eskopti Kemper, e voe digemet evel eun tad hag eur mignon gant an Ao. Canant, person ar barrez. Eno eo e tremenas e euriou diweza, war an douar, e-unan penn gant e grusif.

D'e gompagnon ordinal, an Tad Martin, a felle d'ezañ chom da veilha, e tal e wele, e lavaraz: « Lez ac'hanoun gant kroaz va Salver: e kompagnunez vat emañ. »

War e dremenvan, ar soñj ha marteze ar gwel eus e Vestr mat, Dom Mikael an Nobletz, a zigasas d'ezañ kalz frealzidigez. Ha penaos kaout douctañs war gomzou ar Werc'hez, he doa roet da c'houzout d'ezañ, hanter kant vloaz arak, e teufe d'e gannerza war e eur diweza?

En-dra ma tenne goustadik e huanad diweza, eus torgennou Motreff, daou dest a welas - touet o deus' oa gwir ar pezh a lavaret - oabl teñval eun abardaez mix-genver oc'h en em skleraat soudan eus eur sklerijenn vras. Daoust hag eun tan-gwall bennak eo a ruzie evel-se an dremwel? Kloc'h an anaon a sonas e Plevin, o rei d'ezo ar respont: an Tad mat oa, o pignat da sklerijenn ar c'hloar.

P. D'HEROUILLE. S. J. HAG L. BLEUNVEN.

## DIWAR KANTIKOU AN TAD MANER

Eus kantik ar Baston, ennañ 60 koublad bennak.

« Neuze an heul a semplas  
Ar mein dre greis en em fraillas. »

Eus kantik ar Bater. Fiat voluntas tua.

« Ra vezo gret gueneomp-ny oll  
Ho volonte an oll d'an oll  
Aman epad hon holl buez  
Eguls en en gant an Aeles. »

Eus kantik an Ave Maria. Sancta Maria, Mater Dei...

« Santes Mari, Mam da Zoue  
Sellit ouzomp da bep mare  
Evidomp oll pedit ato  
Bremañ hag en heur hor maro. »



## KALON AN TAD MANER

**G**OUDE ar maro, korf an Tad Maner a dlle beza degaset da Gemper evit beza beziet en iliz-veur. Ar Jezuisted a c'houlenne ar galon da viret en o chapel.

Eun nebeut amzer goude ar maro, e voe roet da anaout ar gourc'hemennou-se da berson Plevin.

Ar medesin a deuas hag a dennas ar galon. Gorroet e voe en eun tamm lien kaer, da c'hedal beza kaset de Gemper.

Gouzout a reomp gant pebez nerz tud Plevin a viras ouz korf o zad mat beniget da vont kuit.

Ne voe gallet kas da Gemper nemet e galon. An Tad DEMAINÉ a en em gargas eus al labour santel-se. Gant eur seizenn en-dro d'e c'houzoug e touge ar galon, hag e reas hent gant an ao. CALLIER, vikel vras, en eur c'harroz. Pa dosteas ar c'harroz ouz Koray, ar c'hleier a voe sonet hag ar barresioniz, ar veleien en o fenn, a zeuas e prosesion da ziambroug ar relegou santel.

P'en em gavas ar galon e Kemper, an ao. N'eskob a yeas d'ar skolach evit enori d'e dro kalon ar misioner bras. Pokat a reas gant teneridigez d'ezl en eur lavaret: « Setu aze eur galon hag he deus bet kasoni ouz an diaoul! » Gallet en devije lavaret: « Hag he deus bet karantez ker bras evit an aotrou Doue! »

Ar galon a voe gorroet en eur voest ploum, furm eur galon d'ezl. Goude eur servich bras kanet evit an Tad Maner, ar voest a voe laket dindan eur skritell arc'hant, e keur ar chapel, dirak an tabernakl...

E Kemper, evel an holl geriou bras, e voe freuz epad ar Revolution. E skolach ar Jezuisted an iliz a oa bet laeret, an aoteriou diskaret. Ar c'holoenn arc'hant a oa war ar maen, m'edo ennañ kalon an Tad Maner, a oa bet diframmet gant eur skrapet bennak. Daoust hag ar galon a oa bet espernet?

Ya, a drugare Doue. D'an 11 a viz gwengolo 1847, an aotrou GRAVERAN, eskob Kemper, gant an aotrou Keraudry, vikel vras, an ao. Eyraud, sekretour an eskopti, a yeas da iliz ar skolach. Dirak an tabernakl, eus tu an hanter-noz, ez oa eur maen kizellet warnañ furm eur galon; siellet oa ar maen gant ploum. An Aotrou Gra-

veran a reas lemel ar maen-se, ha dindannañ e voe kavet eun all, teo kenañ; e-kreiz' oa kleuzet furm eur galon hag er c'hleuz-se ez oa eur galon bloum gant ar gerioù-mañ warni: « Kalon an Tad Julian Maner. »

An ao. N'Eskob a gasas gantañ ar galon-se, da c'hedal ma vije graet eur plas dereat d'he gorren. Ar plas-se a voe buan peur'hraet, ha d'an 10 a viz genver 1848, an aotrou Keraudry, vikel vras, dirak Rener ar skolach ha meur a veleg, a lakeas kalon an Tad Maner en eur bezig nevez, e chapel ar skolach. Ar maen a c'holoe gwechall kalon an Tad Maner a voe laketa adarre war ar bezig nevez ha siellet. Eun daolenn marbr gwenn war c'horre a zo skrivet warnañ gerioù latin da verka emañ eno kalon an Tad Maner.

O veza n'eus mui a Jesuisted e skolach Kemper an Aotrou N'Eskob DUPARC a c'houlennas aotre da denna eus ar chapel kalon an Tad Maner, hag en deus he rei d'ar Jesuisted evel m'oa dleet.

An Tadou o deus graet eur bezig nevez en o c'hapel, e Rozavel, e Kemper, evit degemeret kalon an Tad Maner, ha d'an 31 a viz gouere 1931, deiz gouel sant Ignas, o sant Patron, ar galon a zo bet laketa er bezig-se.

(Tennet eus Buhez an Tad Maner gant an ao. UGUEN.)

## SANTELEZ AN TAD MANER

### I. — PETRA O DEUS SONJET AN DUD DIWAR E BENN

**E**-PAD e vuhez dija, an dud her c'hemere evit eur zant. Digaset e veze d'ezañ ar vugale hag ar re glañv, evit ma roje d'ezo e vennoz; an dud oajet en em lake war o daoulin dre ma tremene. E amzerioù diweza e vuhez, ar perrukenner a droc'he o vleo n'o leze ket da vont da goll, met o dastumm a rae gant doujañs evit o rei d'an dud evel ken alies a relegou.

D'ar medisin a wade anezañ e veze digaset lienaj fresk evit ma vijent soubet en e wad hag al lienaj-se a rae mirakloù.

An Aotrounez eskibien hen douje evel ar bobl. An Ao. du Louet, eskob Kemper, a lavare oa el mat e eskopti; an Ao. de la Barde, eskob Sant-Brieg, hen lesanve « Den doue Breiz »; an Ao. Granzier, eskob Landreger, hen lake war hevelep pazenn eget sant Visant Ferrier.

An dud desket n'o doa ket menoziou disheñvel. An Ao. Le Meur, doktor ar Sorbon, rener Kloerdi ar Misionou a ziañvêz bro, e Pariz, a oa deut da rei an dorn evit mision Tonkedek (1665) renet gant an Tad Maner. Heuilh a reas ar brosejion vras a gloze ar mision, selaou a reas an Tad. Teir eur e padas an traou dindan eur glao dour-bilh. Millerou a dud a oa eno. Keñt e oant dlouz ar prezeger ma n'oa ket posubl da galz klevet. Daoust da ze an holl a leñve. « Ret eo anzañ, eme an Ao. Le Meur, ez eus amañ eun dra bennak eus Doue; eur mirakl eo a-berz Doue, a en em zervij eus an Tad Maner evit hen ober. »

An Neñv, e-unan, en deus diskouezet santelez an Tad Maner dre e-leiz a vuzudou. E 1714, 32 vloaz goude e varo, an Tad Le Roux karget da ober eun enklask war e vuhez, a rae meneg, en e leor, eus tost da 300 burzud. Hag al leor-se a voe kavet mat gant Tadou rener ar Jesuisted, gant an Ao. de Ploëc, eskob Kemper, ha kinniget da Vreujou Breiz, el lec'h ma oa meur a hini hag a oa bet test eus ar burzudou.

### II. — PETRA EO BET SANTELEZ AN TAD MANER

Eur zant, hervez a zo bet lavaret, a zo eun den merket gant gras Doue hag a gemer ar vuhez hag an Aviel evel traou a bouez bras, eun den hag a zervij Doue war an douar, evit beza sur da vont gantañ d'an Neñv, eun den hag a vale war roudou Jezuz, en deus dre e varo digoret d'omp an Neñv.

Ma taolomp eur sellig war vuhez an Tad Maner, e welomp en deus sevenet da gement-se, en eun doare dreist.

Merket eo bet gant gras Doue azalek e amzer genta. Eus penn pella Breiz, Dom Mikael an Nobletz a roas da anaout 'oa ganet war harzou an Normandi, an hini a dlle dont war e lerc'h, e labour ar misionou.

Savet mat gant e dud, ar soñj eus an ifern da ziwall outañ, hag ar Baradoz da c'houmit, ne guita ket e spered. War an dlou wirionez vras-se eo e tiazexo e visionou.




Photo Le Grand

## KROAZ AN TAD MANER

Ar skeudenn-mañ a ziskouez d'omp Kroaz an Tad Maner.

Tri c'hant vloaz he deus d'an nebeuta. E kouevr eo graet.

Bez' he deus eun hanter troatad hed hag eur meutad led.

Miret eo e Kemper, e Rozavel, e ti ar Jesuisted. Alies, ar re glañv, hirio c'hoaz, a c'houlenn pokat da groaz « an Tad Mat ».

Ar Groaz-se, emichañs, eo a zouge an Tad Maner, war e galon, en e visionou.

Ken alies a voe poket d'ezhi gant an tad Maner ha gant ar gristenien a zeue d'e gavout ha da glevet e brezegennou, ma ne jom mui netra koulz lavarout eus an dremm ha nebeut eus an daouarn hag an treid.

Rak-se eo eur relegenn talvoudus meurbed. Dirazi hon Tadou koz o deus pedet. En eur boket d'ezhi o deus goulennet pardon eus o fec'hejou ha diskleriet o c'harantez evit o Zalver.

Evit mont d'ar Baradoz eo ret KARET DOUE, KARET AN NESA.

An Tad Maner en deus karet Doue eus eur garantez a galon. E-kreiz e labouriou brasa ne golle ket ar soñj a Zoue. E vuhez a zo bet eur bedenn badus: « A! her c'haret a ran an Doue-se! » a veze klevet o lavaret.

Ouz an Aoter oa evel eun el. Goude beza labourer a-hed an deiz, e tremen eul lodenn eus an noz o pedi. Karet en deus Doue, e gwirionez, en eur ober, araok pep tra, e volontez; en eur zoubla bepred d'ezl. Servichet en deus Doue, en eur implija e vuhez a-bez da c'hounit d'ezañ eneo.

Karet en deus an nesa, n'eo ket hepken dre gomzou, met dre oberou, o kaout ar vrasa doujañs evit e superiozed, o veza madelezus evit ar re a vev en e serr pe a gave war e hent.

Karet en deus e enebourien, o viret ne vijent skoet gant ar justis pe gant kounnar ar bobl.

Evit heulia gwelloc'h an diou garantez-se, ez eo bet rust evitañ e-unan. Piou lavaro ar pinijennou en deus grêt, ar skuizder, ar c'hleñvejou, an dismegañsou, en deus gouzañvet hep klemm an distera?

Gouzout a rae n'eus silvidigez ebet en diavez eus hent ar Groaz. Pasion Hor Salver a zo bet e zevosion vras..

### III. — PREZEG D'AR RE-BAOUR, MERK BRAS SANTELEZ AN TAD MANER

Pep kristen a dle beza abostol. Ne c'heller ket lavaret e karer Doue ma ne glasker ket lakaat an dud all d'e garet. Ne c'heller ket lavaret e karer an nesa ma ne glasker ket ober vat d'e ene.

Ma tle pep kristen beza abostol, pegement muioc'h pep relijiuz, pep beleg!

Adalek an deiz m'oa digemeret e kompagnunez Jezuz ar Breur Maner a zo entañt e galon gant ar youl d'ober vad d'ar bed holl. Mall en deus da veza misioner er broiou pell. Pa roer d'ezañ da anaout eo da Vreiz-Izel eo e fell da Zoue ec'h en em roje, e stag korf hag ene d'al labour.

E-pad 43 bloaz e vezo abostol Breiz, oc'h ober an traou souezus graet gwechall gant Jezuz e-unan: « Mont a rae eus an eil lec'h d'egile, oc'h ober ar vad hag e rei ar pare da gement hini a oa dindan galloud an diaoul, rak Doue a oa gantañ. » Ne lavaro nann da hini eus eskoptiou Breiz, met tachenn e labouriou a vezo dreist pep tra an hini merket d'ezañ gant an Neñv: eskopti Kerne.

Ne ra fae war den, met ar re dosta d'e galon eo ar re vihan, ar re zizesk, ar re baour, kement hini a zo disrannet eus madou an douar... Ganto emañ e familh hag i eo a ro d'ezañ an ano a DAD MAT.

D'an holl e tispleg komzou Doue, hep damanti, gant nerz ha douster, en eun doare didroidell, dre zarmoniou, dre gonfereñsou. Met ar pez a blij ar mui d'ezañ eo ober katekiz. Evel Dom Mikael, e tisplego an taolennou, e rolo eur plas bras d'ar c'hantikou.

Evit sikour ar veleden ne oulent ket a vrezoneg, e skrivo evito eul levrig: « Le Collège de Jésus » a gaver ennañ an divras eus ar gelennadurez kristen hag eun doare da zeski ar brezoneg.

Tremen a ra al lodenn vrasa eus e zerveziou er gador-govez, alles eul lodenn eus e nozveziou. Gant eur galon a vamm eo e roe digemer d'ar bec'herien baour ha ne esperne netra evit o diframma eus skilloù an droug-spered.

Evit tizout muloc'h a eneo e c'halvo en-dro d'ezañ beleien d'e zikour hag e tiazazo, ar pez ne weler marteze nemet en hor bro, ar strollad misionerien-se, hag a gendalc'h bremañ atao e labour abostolik...

Goude kement a aked hag a galon da lakaat karet Doue, n'eus ket a lec'h da veza souezet m'en deus an droug-spered graet brezel spontus d'ezañ. Pep tra en deus ijinet evit freuza e labour (heskinerez, tamallerez-e-gaou hag all...). Dre zikour an Neñv, dre e basianted, dre e izelded a galon, an tad Maner a drec'has e ardou ha re e veleden.

Lavaret am eus: sikour an Neñv. An holl visionou a veze laketa dindan skoazell Mamm Doue. Pedet e veze sant Korantin, santez Anna, Sant ar vro. An Tad Maner a c'halve d'e zikour holl sperejou eurus ar Baradoz evit rei lamm da arme an droug-spered.

TAD JOLLEC, S. J.

# AN TAD MANER HAG AR BREZONEG

**B**UHEZ an Tad Julian Maner a zo bet displeget meur a dro ken e galleg ken e brezoneg (Bleuzen 1876 - Uguen 1923). Ne roan amañ eta nemet eun diverra, peadra hebken evit hentcha lennerien ar Bleun-Brug war roudou oberou brezonek an Tad Maner.

O veza m'eo bet ganet e Breiz-uhel, e Sant Jorj Reitembault e 1606 ne ouie ket a vrezoneg p'en em gavas e skolaj ar Jesuisted e Kemper e 1630. Kelenner e oa eno pa zontas beza misioner ar Vretoned.

Goulenn a reas digant Gwerchez Ti Mamm Doue he skoazell evit deski buan ha mat ar yez. Sentet e voe outañ. Dindan nebeut amzer an Tad Maner a voe barrek da brezeg.

Kantiker eo bet an Tad Maner. Ne gave netra gwelloc'h eget kantikou evit kentelia an dud epad ar misionou. N'eur ket deñt a-benn da c'houzout piou a zavas al leor « Cantiquou spirituel da beza canet... Composit bet a nevez gant an Tat eus a kompagnunez Jesus. E Quempercaurentin 1642 ». Lod a lavar an Tad Maner eo, lod all a lavar n'eo ket hen.

Ne 'z eus douetañs ebet avat war ano aozer eul levr all a gantikou « Cantiquou spirituel hac instructionou profitabl evit disqui an hent da vont dar Barados. Composit gant an Tad Julian Maner Religius eus ar Compagnunez Jesus ».

Peadra 'zo da veza souezet o lenn war mouladur al leor-mañ, e 1678: « Corriget hag augmentet ganta a nevez en edition pemzevet-mañ. » Pemzek mouladur! ha ne anavezet, me da vihana, skouerenn all ebet eus ar pevarzek mouladur all.

28 kantig savet gant an Tad Maner a zo e kanaouennou Santel an aotr. G. Henay (1865). Bez ez eus pevar anezo e kantikou Eskopti Kemper ha Leon (1942-1947).

Evit d'an dud deski buan e gantikou an Tad Maner a lakae outo toniou anavezet gant ar Bobl muloc'h zoken a doniou galleg eget a doniou brezonek. Evit d'ar geriou kemma gant an toniou an

Tad Maner a renkas e gantikou a doare ar re c'hallek. Doare koz ar Vretoned da werzonna a varvas diwar-se.

Hen eo, avat, a vould'has eun doare nevez da skriva brezoneg hervez ma veze komzet. E 1659 e lakeas moula eul leor d'ezañ eun ano drol awalc'h « Le Sacré Collège de Jésus... » hag a zo eur grama-deg hag eur geriadur war eun dro. Betek neuze ar Brezoneg a veze skrivet heb kemma lizerennou-penn ar geriou: « Amzer brao da mont da pourmen. » An dud a ouie lenn a ranke kemma ar geriou-ze en eur lenn en doare ma vezent lavaret.

Etouez kantikou an Tad Maner unan hirr a zo: Buez Sant Caurintin 766 gwerzenn d'ezañ. Moulet eo bet dispartil doare eul leorig d'ezañ.

An Tad Maner a aozas ive: « Templ consacret dar Passion Iesus-Christ battiset gant ar Speret glan er galon ar c'hristen devot... »

Hag eul levr rouez-tre anvet « An abrege eus an Doctrin christen da zisqui e pep ilis Pares, er chapelou, da Sul ha da Oüell, er scholiou hag e pep ty. » Betek-hen ne'z eus bet kavet nemet diou skouerenn anezañ. Unan a zo e Paris el leordi Broadel, eben e Rom. Kaset oa bet di, en 1890, pa voe kroget gant ar Gongregasion enklask war vertuziou an Tad Maner.

Setu ano eul leor all « Mellezour ar galonnoù. Instruction meurbed utile dar confessoried da interroge ar re a cofez outo ha profitabl da neb a gar prepari da ober eur gofession general pe ordinal, composit gant an Tad Julian Maner. » Kredi a ra lod n'eo ket hemañ diwar dorn an T. Maner. (1).

Gwall-zister eo brezoneg an Tad Maner, hini e amzer eo. Hirio ar brezoneg a zo eun tamm mat yac'hoc'h ha pinvidioc'h ha koulskoude biskoaz ne voe gwelet ha klevet kement a dud o nac'h o yez broadel. Leñva rafe an Tad Maner hen hag a skriva « Ra vezo meulet Doue e brezoneg, betek fin ar bed. »

L. LOK.

(1) Ma c'hoantat lenn lod eus oberou an Tad Maner kemerit « Leor an Tad Maner » bet moulet gant Gab. Milin e 1876. Diou gevrenn a zo ennañ. Ar genta a zo « Quantellou Jesus d'an oll dud fidel » tennet eus ar Sacré Collège de Jésus, an eil « an Templ consacret ». Nebeut a gempenn a reas d'ezo G. Milin.



# E-TOUEZ SKOAZELLOURIEN AN TAD MANER

**S**OUEZET e chomer o welet penaos o deus gallet daou zen, evel Dom MIKAEL AN NOBLETZ hag an TAD MANER adsevel ha nevezi eur vro hag a oa kouezet ken izel eget hor Breiz.

Gouzout a reomp ez oa bras o santelez ha dre eno ive o deus bet ker bras galoud war an eneou. Met, e gwirionez, sikouret int bet gant eneou devot, merc'hed santel, hentchet ganto war hent ar baradoz, a ouestlo o buhez d'ar bedenn ha d'ar binijenn, evit lakaat grasou Doue da ziskenn war labouriou ar visionerien.

En o zouez, e kavomp daou ene santel a en em ginnigas da Zoue evit gouzañv poan evit dizursiou o amzer: KATEL DANIELOU hag AMIS PICARD.

Katel Danielou, unan hep mar ebet, eus gwella servicherezed en deus bet an Aotrou Doue, er vro-mañ, a c'hanas e Kemper, evit beza silvidigez eleiz a dud er bloaz 1619. O welet pegen fallik oa o tont war an douar, he zad, den a feiz kreñv a yeas ganti raktal da bardona d'ar Folgoad; eno an Itron Varia a roas d'ezhi ar yec'hed; met, gwasa pezh a voe, e varvas e unan, er bloavezh war-lerc'h, hag, e berr amzer, Katel gèz, kasaet gant he mamm ha he lez-tad, a deuas he buhez da veza eur verzerenti.

Hanter vaget, evit an distera digarez e veze silapet er-mêz da loja, gwelet e veze o krena gant ar yenienn hag o c'hlaouri gant an naon; ha c'hoaz dioueret bara ar c'horf a yoa eur binijenn vihan eviti, e skoaz dioueret bara an ene; c'hoant he doa da c'houzout he fater hag he c'hatekiz evel ar vugale all, met he mamm a rae pep tra evit miret ne vije desket d'ezhi he c'hreañsou. Bemdez ar verc'hig paour a yea da zaoulina dirak skeudenn sant Anton d'an ospital hag eno e lavare: « Pater noster... n'ouzon ket ken. » Ac'hano ez ae da bedi dirak Gwerchez an Tour-Bihan hag eno e lavare: « Ave Maria... n'ouzon ket ken. »

Evit en em zizober anezi e voe kaset eur pennad d'ar C'hastelnevez da di unan eus he moerebed; epad m'edo eno eo ez eas da govez evit ar wech kenta gant an Tad KINTIN, a lavaras d'ezhi e vije hent he buhez leun a zrez hag a spenn hag he divije leun a groaziou da zougen. Kement-se a deuas da wir, dal ma rankas dizrei da di he zud. Kement voe graet warni ma oa tost d'ezhi beza lazet, eun deiz.

Dem goude, Katel a yeas da jom da Vro-Wened da heul he zud; dimezet e voe eno d'eun den pinvidik, koz ha drouk. War alj eur relijius, a lavaras d'ezhi n'he doa pec'hed ebet o kuitaat eur pried ha ne glaske ober nemet gwall vuhez d'ezhi, e tizroas da jom da Gemper. Eno ec'h en em roas da labourat a-zevri evit gounit he bara, sikour ar beorien hag ober he silvidigez.

Kemeret a reas evit kovesour an Tad DE LAUNAY, eus kompagnunez Jezuz, abalamour ma ouie brezoneg, ha d'e varo e vo renet gant an TAD BERNARD ha gant an TAD MANER; an daou-mañ a oa oc'h en em lakaat da rei misionou e Breiz-Izel. Katel Danielou a voe eur vamm evito, kinnig a rea he feaniou da Zoue evit ma tougje o labour frouez puilh; lavaret a rae d'ezo war betra hag a enep petra prezeg.

Devosion vras he devoa da bemp gouli Hor Salver ha da zeiz glac'har ar Werchez; adalek 1643 e c'houzañvas peanlou krisoc'h, hep gwener, ha derc'hent ar gouelioù bras, hag an dra-se a badas betek he maro.

An droug-spered a reas d'ezhi gwasa ma c'hellas. Evelato n'eo ket e yudazerez eo a c'hloaze ar muia ar vaouez santel; he brasa poan a deuas eus an taolioù roet d'ezhi gant an dud a jliz, dianaoudek eus an hentehou ma vez kaset dreizo eneou a zo. A drugare Doue, an Ao. N'Eskob hag he daou govesour a jomas a du ganti betek he maro.

Estreget eur wech e tiskouezas anaout an amzer da zont.

Evit beva didrousoc'h e yeas da jom da Zouarnenez; eno ne jomas ket dibreder; daoust m'edo beleien ha tud Douarnenez en he enep, e lakeas sevel eur chapel da Sant Mikael, e plas an ti m'oa bet ennañ o chom Mikael Nobletz epad 23 bloaz; n'oa nemet seiz lur er yalc'h pa stagjot gant al labour: « It en-dro, a lavare Katel, peadra a-walc'h a deuo da zevel ar chapel ha goude ma vefe c'hoant da dei anezi gant arc'hant. »


He c'homz a deuas da wir.

Katel a glañvas e Sant Guen, e parrez Mur, bremañ en eskopti Sant Brieg, da zul kenta a viz Here 1667; nebeut araok tremen e lavaras en eur sevel he divrec'h hag he daoulagad etrezek an neñv: « Tost, tost, tost! » Mervel a eure en eur boket d'ar groaz d'ar 4 aviz Du 1667. Eun dourn ha ne voe gwelet gant den a deuas da zerri d'ezhi he genou hag he daoulagad; he mestrez vat, ar Werc'hez Vari, he doa lavaret d'ezhi dek vloaz araok e teuje da renta ar zervich-se d'ezhi.

Pemp dervez e chomas war he gwele a varo; c'houez vat a zave diouz he c'horf: sebellet e voe e jliz Sant Guen tost da aoter an Anaon, dirak 28 beleg hag eur mor a dud; an Tad Maner a zigouezas p'edo dija diskennet er bez; met o veza ma n'oa ket goloet he fenn e c'hellas e welet ha touch outañ chapeledou ha traou all. Person Mur a reas eur brezegenn da embann he vertuziou, he labouriou, he foaniou gouzañvet gant kement a basianted. Burzudou a c'hoarvezas war he bez; eleiz a gendalc'h d'en em erbedi outi gant fiziañs; he ano benniget ne vezo biken ankounac'haet gant ar Vretoned.

(Tennet eus skridoù Y. V. PERROT.)

(Er miz a zeu : buhez Mari Amis Picard)



Kemper e amzer an Tad Maner)

# DA HEUL AN TAD MANER

Nikolaz Saluden a Dremaria a voe ganet e miz meurzh 1619 e maner Kerazan, war rouar Kleden-ar-C'hab. Keit ha ma chomas er gêr, e voe eur paotr fur. Met, aet d'ar skollou, pell diouz e vamm, e heulias skoueriou e gamaraded fall hag e tilezas lezenn Doue.

D'e 25 vloaz, e voe anvet kuzulier e Lezvarn Breiz. Dimezi 'reas; daou vogel en doe. Met yaouank c'hoaz e chomas intañv.

Goude maro e dad, e teuas Nikolaz da veza mestr war madou bras. Ha muioc'h-mui en em roas d'an dizurziou. Ma ne fellas mui d'e vamm chom gantañ. Dont a reas-hi da Gemper, e kouent an Urzulined renet gant unan eus he merc'hed. Eno e pede hag e aspede Doue da gemer truez ouz he mab.

E 1643, e teuas an Tadou Maner ha Bernard do ober misionou er C'hab. Met aotrou yaouank Tremaria na yeas ket da selaou o frezegennou, hag an Tadou o chom koulskoude e tj e dud.

Distrei 'reas ar visionerien e 1644 hag e 1648. Tud ar C'hab a gendalc'he da vezo fidel da Zoue. Hag an aotrou a chome kaledet er pec'hed.

Seiz vloaz goude. Eun abardaevez nevez-amzer. Heug a savas en aotrou Tremaria. Tanvaet en doa plijudariou a bep seurt. Ha goulo e kave e vuhez. Goulo, didalvoud. Perak beva 'vit netra? Perak chom da glevout rebechou e goustiañs ha klemmou e vamm?

« Echui 'ran ganti dioustu!... » Kemer a reas eur bistolenn. E voe o vont d'en em laza pa savas eur vouez eus ar grusifi a oa war an daol: «Sko! sko 'ta!» Souezet-mik, o krena, e lezas Tremaria e arm da goueza, hag evel Sant Paol war hent Damaz e lavaras: « Va Doue, petra 'fell deoc'h a rin? »

Edo 'r C'horalz. An Tad Maner a visioner er Vro-Vigoudenn. Met dont a reas kelou dezan ne oa prezeget ebet er C'hab. Setu ma teuas da Gerazan, hep dezan gouzout netra diwar benn stad-ene aotrou Tremaria.

En e gambr, en em lakaas an Tad da sonjal: « Va-unan emaeun abaoe maro va mignon, an Tad Bernard, Koulskoude, na bras ha kaer an eost da zastum... ma vefe eosterien! Plom 'c'hellfe va sikour? Aotrou Tremaria ma karfe: intañv eo, dilezet en deus e garg... E vuhez avat n'eo ket gwall gristen... N'eus forz. Aotrou Doue, selaout ouz pedenn eur paour! »

E-pad e gousk e teuas da vestr Kerazan eun huñvre; gwelout a rae an Tad Maner o kuitaat ar maner gantañ eur sac'h war e gein, eur vaz en e zourn. Redek a reas war e lerc'h. Degouezet e toull dor an ti, setu ma lammas warnañ daou loen spontus, morzollou ganto; hag i da youc'hal: « Chom amañ, deomp out! » Neuze 'krogas eun ael en e vleo ha setu-heñ dreist an diaouled hag e-kichen an Tad.

D'ar mintin, hep lavarout d'ar misioner netra diwar-benn kement-se ez eas gantañ betek Plogov. Gant joa e selaouas ar c'hatekiz, ar c'hantikou hag ar prezegennou.

War lerc'h merenn, e lavaras d'an Tad: « Heuet oun gant ar vuhez a bec'hed. C'hoant am eus da vont d'ho heul! »

— Setu ar respont d'am fedenn dec'h d'an noz... Lavarit kenavo d'ho kerent ha d'ho mignoned, hag it pell diouz an degouezadennoù risklus. »

Fiziout 'reas aotrou Tremaria e vugale en unan eus e c'hoarezed, goulenn bennoz e vamm ha mont da Baris da studia 'vit beza beleg.

Pevarzek miz goude e lavare e oferenn genta ha distrei da Vreiz. Hag e-pad 18 bloaz e voe gwella skoazeller an Tad Maner.

K. RIOU.

# DIWAR KANTIKOU AN TAD MANER

Eus kantig war an Ourgouil.

« Ar gloar so ur rosen  
Dious ar mintin bleünvet  
D'an noz couezet, ne bad quen,  
Enhi na fizit quet. »

Eus kantig war ar Burete hag an ocasionou fall.

« Mar querzit voar luu brout  
Contraign e viot da santout  
Ho t'reit o poazat  
Hag ouz ar peg mar touchet  
Neuse souden e santet  
S'aguet ho piziat. »

An ao. Kerdaffret, person Pondi « La rénovation religieuse de la Basse-Bretagne: 1859 » a lavar en deus kavet e kantikou an TAD MANER « une lumineuse simplicité, une piété tendre et une onction pénétrante ». Mont a ra betek diskleria: « Sous le rapport de la simplicité, de la clarté et de l'unction, aucun poète breton n'a encore surpassé le Père Mau noir. »

# GERIOU KROAZ AN TAD MANER

gant K. Riou

A-blaen: 1. Kêr St Kaourintin. — 2. Er miz-mañ vo bras an hini rentet d'an T. Maner. — Implijet a-wechou e-lec'h ABAOE. — 3. Meur a damm 'zo bet uzet gant an T. Maner. — Lister (pluriel) HOUARN. — 4. Pedenn. — Diwech ar memes vogalenn (voyelle). — 5. Evit nac'h. — REI, kemmesket. — 6. Digoret en deus an hent d'an T. Maner. — 7. An T. Maner en deus kaset e hini da benn. — Mammenn. — 8. Skiant ar rede-rez.

Na bras, na bihan. — 7. Evito e vevas an T. Maner. — 8. Den eurus, misioner e Breiz.

	1	2	3	4	5	6	7	8
1	K	E	R	S	T	K	A	O
2	E	R	M	I	Z	M	A	N
3	L	E	Z	A	R	A	B	O
4	H	O	A	V	E	S	T	E
5	N	A	B	I	H	A	N	
6	M	A	M	M	E	N	N	
7								
8	S	K	I	A	N	T	A	R

A-zerz: 1. Ar pezh a voe an T. Maner e Kemper, da genta. — 2. Ho prasa tefzor. — A daole an eor. — 3. Lakaat war vor. — Kaout lojeiz. — 4. Penn eur prezeget. — N'eo ket bras. — 5. Evit gervel. — Merk an esperañs. — 6. Pesk plat. —

## RESPONT DA ZIVINADENNOU MIZ EBREL

1. Eur garreg.
2. Peder bronn ar vioc'h.
3. An hent pe ar wenojenn.

An divinadennoù ha diskoutm Geriou-Kroaz miz Ebrel a vo roet en niverenn a zeu.



*Photo Jus Le Deare*

" Chelaouet, va c'hernevis, discleria a fell d'in,  
Ar vuez miraculus ho tad sant Caurintin,  
A zevas e Breiz-Izel dre ordrenanç Doue  
Da veza escap quenta ha patron a Guerne. "

Gwerzennou kenta buhez St Korantin  
gant an Tad Maner.